

An deiz all 'penn ur bern plouz
(*polka plinn*)

An deiz all 'penn ur bern plouz (x 2)

An deiz all 'penn ur bern plouz
Me 'soñje kousket didrouz.



*

A'i a reas ur pikol yar (x 2)

A'i a reas ur pikol yar
Ha kren' 'rae ganti an douar



*

War he lerc'h ur pikol louarn (x 2)

War he lerc'h ur pikol louarn
Ha piket gantañ e zivskouarn.



Neuze ' tremenas ul louz (x2)



Neuze ' tremenas ul louz
A rae c'hoazh muioc'h a drouz.

*

Al laboused ' begoù ar gwez (x 2)

Al laboused ' begoù ar gwez
A lavare 'n eil d'egile :



*

Gwashoc'h eo ar sparfell rouz (x 2)



Gwashoc'h eo ar sparfell rouz
'Vit n'eo ul louarn pe ul louz.

*

Ar sparfell rouz gant he beg kamm (x 2)

Ar sparfell rouz gant he beg kamm
A lazh an tad, displeuñv ar vamm.

*

Ha bemdez ' kouezhint en ifern (x 2)

Ha bemdez ' kouezhint en ifern
E ve'int poazhet kig hag eskern.